

352

## Sant Roch.

(427)

Var an ton Galles.

Canomp, breudeur, devotamant ar vue  
 Eus ur zant cōz, a nevez composet;  
 Ne guemerfomp get ton ar passe-pie  
 Erit ger caer ha gen devot sujet.

Mes dre vouez tener  
 E tisquelfomp scler  
 E voe Sant Roch  
 D'an diaoul ur goal groc.

En ur vilajen a voa hir ha ledan  
 E voe ar zant gen enorus ganet;  
 Gent pemzec vloas en em disqueuz da Zatan  
 Cren, gourd, hardi, courajus ha calet.

An diaoul er starde,  
 Ar zant a stowime:  
 Biscoas Satan  
 N'en discaras dindan.

(428)

Un druilennec, o c'houlen an aluzen,  
 A voa e gorf dre 7r yemien fuimet;  
 Ar zant, bragou, justecor ha jiletan,  
 Hep chipotal dezan en eus stlapet;

En corf e rochet  
 D'an ilis e ret,  
 Hep mez nac am,  
 Da glêvet ar zermou.

An oll a voar en em gar er zermou  
 Tud fur, tud sod, tud devot, quelerrien,  
 Tud a zelaou, digor-franc o quinaoyou,  
 Qeita ma cousq re all en o c'hichen.

(429)

Evelse, Doue,  
 D'e oll vugale  
 En eus lezet  
 Liberté a speret.

Pa veljet Roch, darr a gommanç da c'hoarzin,  
 Darn da vouela, dre druez vras outañ,  
 O velet noaz e ziouvorzet, e zanulin,  
 Dre 'n ruzer rust, qen ruz evel an tan;  
 Ar predicator  
 A ras dre fulor  
 Er charreal  
 Evel un aneval.

Rentet ermeaz, en em velas bafouet,  
 Qen dre 'n dud cōz evel dre 'r re yaouanç:  
 Ar vugale er pousiu a doliou fouet,  
 A doliou mein hac a zornadou fanç.  
 Gant paciantet,  
 Honorus meurbet,  
 Roch a souffras  
 Dismegañçou qer bras.

(450)

Mes en e dy, pa êruas er quis-se,  
 E dad a fell rei dezân cant bazad;  
 Ar zant a dou, pën diaoul bras d'en dougje,  
 Eo da Joue en eus roet e zillat.  
 An tad, dre goler,  
 A grog er goter,  
 Gant e dorgen  
 E faout d'ar zant e ben.

Pa velas Roch ne alle get en e dy  
 Ober errad e zever a gristen,  
 Pell anezân e zas da glabq minih,  
 Hac er c'hoajou e tei'h gant e qui quenn.  
 Ar fur Brovidanç,  
 Euit o chevanz,  
 A bourvezas  
 Qiq vriz ha bara poas.

354

An Autrou qy a yê dre quër da bourmen,  
 Bep tri devez evit an ordinal,  
 Ha pa vele var stalou 'r voulongerien  
 Bara dispac e paq unan ractal.  
     Neuz e da guerzet,  
     Vel ur c'hy scotet  
     Etre 'r c'hoat  
     Da gaout e gamarat.

(451)

Evel ma voa ive d'ar chasse disquet,  
 Nôs ha mintin e furche c'hec'h ha traon;  
 E dog d'ar Zant a zervich da c'hobelet,  
 Ha gant e varz e perchenne ar c'hraon,  
     Pa ras ar vocen,  
     Eurzus femellen,  
     An dispart  
     Etre Roch hac e guy.

Pa velas Roch tostât e heur diveza,  
 E lavaras pemp pe c'houec'h dremm;  
 Goude, allas! va c'hy qez, te chom amâ;  
 Me ya da lavarret va in mamad.  
     Divlam a vue,  
     E rent e one  
     En quir gristen,  
     En divrac'h e guy quen.

(452)

Un eal souden a ziqennas eus an èr,  
 Diou asgallet, blêo frizet, diou chot ruz,  
 Pini savas eon evel un alc'hoeder  
 D'ar barados gant an ene euruz,  
     Tost d'ini Sant Men,  
     Var beg un dossen,  
     E voe placet  
     Dre 'r zent hac an eilet.

Er plas caer-ze gouscoude en eus glac'har,  
 Credi a rër n'en deo get hep rêson,  
 Pa vel bemdez e varc'h e tal Sant Alar,  
 Hac e borc'hel e qichen Sant Anton,  
     Ar Profet Eli

(453)

355

E mesq e vini,  
Hac e guy mad  
Oc'h hirvoudi dre 'r c'hoad.

F. Guenveur.

(Vol. IIS, pages 427-429 et 450-453.)  
15 str. numérotées.

[La pagination du ms. saute de 429 (recto de page) à 450 (verso de la même feuille.)]

Le nom de F. Guenveur est d'une encre plus foncée, et semble avoir été ajouté postérieurement.